

CANTIC SANT GUEVROC.

Ton : *Iste Confessor.*

Canomp oll hirio, gant laouenedigez,
Gloar ha meuleudi da Batron hor parrez,
A zo bet savet e palez an Dreindet

Leun a joaustel. (1)

Piou a lavaro pegen santel eo bet
Buez ha maro sant Guevroc benniget ?
Evit kement-se ret e ve kaout mouez

An alez memez.

Feiz ag esperans ha garantez guirion,
Aa oll vertuziou a garge e galon :
Dreist oll e kare Jesus-Christ hor Zalver,

Ag e Vam dener.

Pur evel-un el, douc, humbl ha patiant,
Morse ne zuas sae guenn e vadiziant ;
Tremenet en deuz e vuez er beden,

Ag er binijen.

Castel, Lanneuvret, Loc-Kirec, Plouzeniel,
C'houi 'zo bet festou eus e vuez santel,
Ag eus ar galloud en doa ive, neuze,

E kevêr Doue.

(1) *Deiz ar gouel* : Da gever hirio, e palez an Dreindet
Ez eo bet savet.

Ag a becherien da Zoue gounezet !
Ag a glanvourien ganthan bet pareet !
Eus pep korn a Vreiz a teue hon-tud coz
Da glask e vermoz.

Autrou Sant Guevroc, brema eus an Envou,
Clevit hor c'hantic, clevit hor pedennou,
Ha taolit varnomp eur sell a drugarez,
Ag a garantez.

Grit ma zaïmp, eun deiz, oll ganeoc'h da repoz
Da velet Doue e gloar ar Baradoz
Eileach ma canimp meuleudi eternal
D'an Dreindet Santel.

Ni 'velo neuze, Jesus ag ar Verchez,
Ag en dro dezo ar Zent ag an Aelz
Beüzet en eur mor a blijadurezou
Ag a zelison.

Gloar d'an tri Ferson eus an Dreindet Santel :
Da Zoue an Tad ha d'e Vab Eternel,
D'an Spéret-Santel : o zri eun Doue ebken
Gloar da virviken !

Amen.

